

Berthou Yves (Alc'houeder Treger) Pleuvihan 1861 – Pleuvihan 1933).

Dihun Breiz (1901).

Modernnaet eo bet an doare-skriva. Reizet ez eus bet reiz meur a her, lakaet e brezoneg evel ar ger kevatal e galleg, ha meur a gemmadur. Ober a ra gand “pehini” ha “pere” evel ma veze greet en amzer-ze gand an oll skrivagnerien, diwar skwer ar galleg. Meur a vi-koukoug a zo er skrid orin. Implijoud a ra “zo” er stumm naha.

Krenn a-du ema a-eneb Dispah 1789, ha gouennelour war eun dro. Deuz an tu dehou an hini pella e oa Berthou.

Iskiz a-walh eo ar skrid-se : gand Breiz-Izel ema ar wirionez. Red eo anzav e vez soñjet gand meur a hini evel-se diwar-benn o bro dezo o-unan.

Souezet e vo sur a-walh meur a hini o weled eur seurt skrid bet adembannet ganin. Me zoñj e vefe mad anavezoud mennoziou ar re n'emaom ket a-du ganto.

Dihun Breiz

Ne zo mann gwirroh 'vid ar skeudenn-ze, nehuz ha frealzuz en memez amzer. Pa 'mañ Bro-Hall en em lezet da vervel, setu amañ ar broiou keltieg – o ! tra vurzuduz ! – divalo c'hoaz, mez gand eun nerz didrehuz o sevel o mein-bez minerez. Galloud a reer, a-vremañ, diougan an deiz en pehini¹ adarre, 'n o zav war dachenn ar Maro, en em zellfont gand eur joa zouezet, hag en em unanfont gand eun hevelb c'hoant da dasevel, da veva diere, ha d'en em lakaad war vrall evid tanfoletri 'barz ar mor en eur vountadenn spontuz ar waskerien, pere², c'hwezeg kant bloavez a-hed, o-deus moustret anezo.

An tri-ugent vloaz renet gand ar Rouanez koant Victoria genta, e-pad pere tri milion Iwerzonad o-deus kuitaet an douar strujuzet gand o labour ha gand o gwad evid mond da zevel eun douenn³ nevez en tu all d'ar moriou – d'an Amerik - evel gwechall on zadou en Arvor – an tri-ugent bloavez a vaheriaj en-pad pere eo marvet tri milion Iwerzonad all dre an naon hag ar gouliou, war heñchou poultruz an Enez-Hlaz, an tri-ugent vloaz-se n'o-deus ket lammet deuz kalonou an tri milion Keltiad diweza a zo c'hoaz du-hont o kildrei, en-dro d'o douarou laeret ha d'o zier dikaret, ar houn deuz ar hantvejou meuleudiuz, nag ar balhder da veza deuz eur ouenn goz chomet glan nag ivez c'hoaz ar c'hoant da veza diere 'n o bro.

Goud a reer penaoz ar Skos⁴ n'he-deus biksoaz degemeret mad yeo ar Zaoz⁵, penaoz Bro-Gembre ha Breiz-Izel n'o-deus trohet tamm a-grenn deuz o hasoni vrudet 'vid ar Zaozon, pehini 'zo deut deze, ren da ren, deuz pellder an amzer goz. An ano a Zaoz a ra d'ar Vretoned kriza o bizied ha d'ar bleo sevel reud war o fennou. Kasoni, 'vid ar Zaoz, a zo en kement gwazienn 'zo en or horv, ha ne yelo er-mêz nemed gand huanadenn diweza or buhez.

Koulskoude, mar virom-ni, Bretoned an Arvor, ar gasoni vraz-se 'vid ar Zaozon, n'on-deus ket ivez kalz mui a garantez 'vid ar Frañsizion. pevar-hant vloaz 'zo tremenet aaboe ma'z eo bet staget Breziz ouz Bro-Hall, mez bepred n'on-deus ket

¹ pehini : galleg. hini.

² pere : galleg. re.

³ eun douenn : ?

⁴ ar Skos : Bro-Skos.

⁵ ar Zaoz : ar zaozon.

ankouezet en on eneou a huñvreerien hag a vrezelourien, penaoz, daoust d'he gouliou don, nepred gwellaet, or Bro 'oa evurusoh dindan he Rouanez hag he Duked, dre ma oa neuze diere⁶.

An amzer dremenet n'en-deus ket degaset dim biskoaz ober-mad a-berz Bro-Hall dizanaoudeg, lezvamm-bro roet dim dre youl an Dukez Anna deut da veza Rouanez Frañs. Meur a Vreton ne ankouezo biken, kaer zo gervel anezi an *Dukez vad*, ar boan he-deus greet dim. Nann, rag Breiz 'zo bet bountet ha sachet evel eul loen-prena, e-leh eur vestrezig en em ro 'n heh-unan d'he mignon.

N'on-deus ankouezet yenion Rouaned Frañs evidom, fouge o gisti, ha fouge liperien o botou, pere a zelle ouzim evel tud ouez ; n'on-deus ket ankouezet ivez traou euzuz ar bloavez Trizeg ha Pevar-ugent⁷. Breiz ne gav digarez vad ebed d'an traou euzuz-se, kaer deuz c'hoari eun toullad skrivagnerien fall ha gaouiad⁸.

Mar en-deus an Dispah Braz pladet hag unanet an traou tu bennag, (n'ema ket amañ al leh da studia kement-se), en Breiz, sur, en-deus diskompezet pep tra. An Dijentiled diwar ar mêz a oa 'vel ar bobl en on touez⁹. Gweled e reed aneze o labourad er parkou, o leviel o-unan lost an alar 'barz an ero, hag o tebri ouz an daol gand ar mitizien. A beurvuia e oam noblañs, perhenn d'eul lodenn douar pehini a ree dim beva gand pizoni, marteze, mez dre zur gand enor. Ar gouerien, goude droejou ar foñs paeet d'an aotrou, a oa o-unan aotrounez. An amzer-ze n'ema ket c'hoaz pell diouzim evid ober dim ankoueza giziou gwechall, manet ar zoñj aneze e pep tiegez. Koun on zadou en-deus muioh a dalvoudegez eged an istoriou skrivet a-dreuz 'vid sebeza an dud dister.

Or giziou-bro, pere o-deus c'hoaz nerz-lezenn en Breziz, a ro testeni deuz gwirionez kement-mañ.

An Dispâh Braz n'en-deus ganet en Breiz nemed ar baourentez, an dizunvaniez hag ar gasoni. Bugale ar re o-deus prenet madou an Noblañs goude beza bouetet an droherez penn, ema bremañ ivez etre o daouarn danvez an dud dister. Al laeron-ze a hall rei dorn d'an Ermêzaded a deu bremañ da vounta ahanom er-mêz or maneriu hag er-mêz on zier-plouz.

Setu bremañ ar mêziou hep tud, evel 'barz ar broiou gouez ; setu amañ ar mestrou fall ha droug pere n'eont ken ouz an daol gand an dud vihan. Sellit aze petra 'zo talvezet dim deuz an Dispah pehini 'dlee rei dim madou a-vern ha lakaad ahanom oll war an heveleb reñk.

Bevet a-walh on-deus, siwaz ! evid gweled ar brezel hep truez, greet pemp-kant vloaz dioustu, en despet dim da blegiou or spered, d'or giziou, d'or buhezegez, d'or yez ha d'or hredennou.

Tra-walh on-deus bremañ da skuilla or c'hwezenn hag or gwad war leur ar broiou pell, war douar Bro-Hall, ken dishañval deuz or mamm-vro, leh emaom o kildrei e-touez fallentez an dud hag an traou, 'barz an anken, gand kleñved ar gêr, ha gand ar geun¹⁰ 'vid an traou karet, maro bremañ.

⁶ or Bro 'oa evurusoh dindan he Rouanez hag he Duked, dre ma oa neuze diere : gand ar frazenn-ze e welom ganedigez an "nasiolatisted" e Breiz. Huñvreal e reent ! Evito e oa Breiz eur "vroad" evel ma reom bremañ gand ar Broiou. E gwirionez e oa eun dalh 'feodal" ha netra ken.

⁷ ar bloavez Trizeg ha Pevar-ugent : amzer an "Terreur".

⁸ gaouiad : fazi. gaouidi anezo.

⁹ An Dijentiled diwar ar mêz a oa 'vel ar bobl en on touez. : O ! A !

¹⁰ geun : keuz.

Ni oll, kouilz ar re o-deus miret o zamm danvez, 'vel ar re bet divohet deuz o herez, hag a zo bremañ, heb netra, paour-kêz baleerein-vro ; ni oll on-deus sehed deuz al liberte. Oll on-deus c'hoant e savfe eun dra bennag a-nevez e Breiz. Santoud 'reom ennom fulor on zadou ! Netra, netra, netra ne deuio a-benn diouzim.

Eur bobl n'hall ket beva mar n'he-deus ket eur yez dezi heh-unan. Gouarnerien Bro-Hall a oar se ; ahane ar brezel greet d'or yez karet. Mar vije an dud-se tud vad, 'leh beza tud a spered fall, lakaet o amzer gante d'izellaad pezh a zo uhel ; mar ne weljent nemed mad an oll e-leh gweled o mad o-unan, e lavarfont penaoz seul-vuih eo braset buhez peb lodenn vro, seul vuih eo kresket pinvidigez Frañs. E-leh klask distruja spered Breiz-Izel, e rofont ali dezi da gerzed war an heñchou 'zo bet digoret gand on zadou.

Muih 'vid ar broiou all, on hini a zo bet distroet deuz he hent. He yez 'zo gwallgaset deuz ar skoliou, stourmet gand skolaerien ouez ar gouarnamant, pere 'zo paeet gand an Enebour evid labourad evitañ. Mez ar Gelted 'zo tud stard. Bez' emaoñ c'hoaz e Breiz pemzeg kant mil Breton, an hanter vad deuz ar bobl, o komz ar yez keltieg. Or skoliou libr¹¹ a oar bremañ petore gwall 'vefe lezel mervel ar yez nerzuz-se, phini eo ar gaerra, ar vuia pinvidig 'vid rei skeudenn d'ar homzou. Dre ma tiskenn he gwrizioù en foñs an amzer goz, he-deus galloud da rei buhez d'ar homzou ; peb ger 'n-eus blaz mad ar frouez gouez. Yez ebed ne oa ken kap hag hi da rei, dre zon peb ger, eur zeblant deuz stumm an dra, ha deuz buhez ar bed ; hini n'eo êzetoh d'ar varzed 'vid ober gwerzioù kaer¹². Drezi, ene Breiz 'deus miret he douster ; kaeroh 'zo : drezi zo c'hoaz eun Ene breizad war an douar...

Breiz-Izel, diouzit 'teuio yehed ar bed...

Breiz, bete vremañ 'deus harzet gand enor 'eneb d'ar brezelioù greet dezi en kreiz an deiz pe dre zindan gand heh oll enebourien, anveet pe guzet. 'N em zavel 'ra c'hoaz, muih nerzuz¹³ 'vid biskoaz, dirag kement hini a hoanta laerez he amdou pe heh ene.

Ar sperejou moan ha kazuz deuz a Vro-Hall ne deufont ket a-benn da lakaad dizunvaniez etrezom. Ar *Re Hlaz*, bountet a-raog gand al lez-vamm, pehini 'zo o larda aneze en krevier alaouret Pariz pe leh all, ne deufont ket a-benn da zistruja en kalonou ar *Re Wenn* hag ar *Re Ruz*¹⁴ eh om, ar garantez on-desu evdi on zadou kêz hag evid or mammig-vro.

« Kasaad a ran an hini na gar ket ar vro 'zo bet roet dezañ », a lavare eur zant braz, sant Kadog. Ar gwir Vreton a dle adlavaroud ar gerioù-ze d'ar re a fell deze naha gizioù hag herez broaduz Breiz-Izel ha disprizoud o herentiaj.

Ne vountfont ket ahanom war an hent nevez leh na weler, en pep tu nemed skeudennou tremenez savet eno 'vid sebeza an dud ; an hent-se a gas d'ar pezh a anver bremañ "Ar progrès", eun dra pehini n'eo netra nemed ar *Hiz Nevez*. En penn an hent-se ar poblou all n'o-deus kavet nemed an dizesper, ar follentez hag ar gernez ; goude beza tremenet dre ar brezelioù breur-ouez-breur.

¹¹ Or skoliou libr : Gand ar skoliou libr, kristen an oll anezo, e vez desket ar galleg, ha difennet komz brezoneg. Ha mar deo eet kuit or yez, anad eo e felle da Vro-Hall distriji anezi, mez e giwrionez ez eo eun afer ekonomikel. Red e veze gouzodu galleg evdi kaodu eru vicher vad, ha bremañ (2011), e-doug ar hantved-mañ, e vezo red gouzoud ar saozneg.

¹² hini n'eo êzetoh d'ar varzed 'vid ober gwerzioù kaer : O !?

¹³ muih nerzuz : nerzusoh. Levezon ar galleg ?

¹⁴ ar *Re Ruz* : Iskiz eo er mare-mañ (2001).

Or ganadur-ni en-deus on diwallet, bete vremañ, deuz an droug. Ar re 'zo pennfollet c'hoaz a deuo d'ar wirionez, mar be' youl Doue ! Mez dre-oll, dirag unvaniez or breudeur drubard gand on enebourien a-viskoaz, ar re 'zo c'hoaz kap da varn gand furnez pezh a ziklêrier dim bemdez ; ar re-ze, 'laran-me, a dle ivez 'n em unani gand kevreur didroha.

Bro-Hall eo hirie foarleh da oll laeron ar bed. Eno 'hallont, heb aon, sevel o finvidigez war madou dismantret tud ar vro. Dirakom e welom eun argadenn nevez, eul laeroñsi-vro.

Ne oar den a beleh e teu an Distrujerien-ze, gand o dent skrignet ha gand o ivinou lemm.

Red eo ma vo Breiz-Izel unanvet mad ha kreñv a-walh pa deuo devez an Drubuill-vraz, 'vid galloud treha, ha skei a-gostez kabestr hag uhal, hag evid gonid he liberte da viken.

Ne dleom ket koll a-wel penaoz eh eo ol lodenn-vro he-deus roet da Vro-Hall - ment 'vid ment - ar muia a dud ouizieg, ar muia a skrivagnerien vraz, ar gwella penntudou a vrezel ; penaoz eh eo en he Barzaz he-deus kutuillet Frañs 'vid ar muia ; penaoz he zud ar muia kaloneg¹⁵, ha penaoz, dreist-oll, ma vije Frañs netra war vor paneved da vartoloded Vreiz, pere a ra eiz lodenn war deg war al listri brezel ha war al listri kenwerz. Larit din hag-eñ n'eo ket douar Breiz eul liorz vurzuduz pehini na houlenn nemed divreh 'vid labourad hag evid rei frouez.

Rag, siwaz ! Pariz hag ar hêriou braz, leh e soñjer kaoud meur a hounidigez, a halv ar baotred hag ar merhed yaouank 'vid o habestri, hag evid o gwaska. Ha koulskoude, kaer he-deus or bro koll he zud, bepred e weler frouez on douar war marhajou Bro-Hall ha Bro-Zaoz. En peb feson, on finvidigez 'zo braz.

Galloud a reom 'ta gortoz, gand peoh-spered ha gand esper, an devez da zond en pehini 'vo gallet troha, hep poan, ar skoulm a stag or Bro ouz eun all.

Adlavaroud a ran : or bro 'zo o tihuni. En pep parrouz deuz ar pella eo krog an dud da houlenn petore mad a deu dim deuz an unvaniez, bet greet pemp kant vloaz 'zo gand Bro-Hall : N'eo deut dim nemed droug evid mad.

Kaoud a reom ar sammou re bounner ha penaoz n'eo ket dleet dim poania 'vid al lodennou-bro all ; penaoz eo kriz ha diskiant kas or bugale d'ar hêriou braz ha d'ar Gêr Veur d'ober buhez fall pe d'ober labouriou louz, labouriou sklaved 'vid pere ne gaver ket a zivreh all. Kaoud 'reom re da lared en eur weled oll dud ar stajou uhel, an eskibien memez, degaset dim deuz ar Pireneou, deuz an Alpou, deuz ar Vojed¹⁶, pe deuz an enezenn Kors¹⁷, oll tud dihalloud da houd pere eo on ezommou a gorv hag a ene ; tud pere 'zo diouizieg oll dimeuz or yez.

Mar vije Breiz-Izel diere, gand he fobl a dri milion a dud, pere 'vefe buan daougementet, ne vefe ket pell o tond da veza eur bobl gallouduz-meurbed.¹⁸

An Istor a gelenn dim penaoz eur vro n'eo ket hepken braz dre vent he douar, mez, kentoh, dre al leh he-deus war ar Bed e-keñver ar broiou all ; dre unvaniez he zud ; dre heh awen hag he spered. N'ankouezom ket eh eo kap ar Vretoned da vond

¹⁵ ar muia kaloneg : ar re galoneka.

¹⁶ ar Vojed : Ne oa ket pell brezel 1870, hag e oa Berthou eur Gall dreist er heñver-ze !

¹⁷ Kors : gouenneler e oa Berthou, evel meur a Hall, e-keñver tud an enezenn-ze, ha memez e-keñver tud Kreisteiz Bro-Hall. Fenean ted a oa anezo, sañset.

¹⁸ pere 'vefe buan daougementet, ne vefe ket pell o tond da veza eur bobl gallouduz-meurbed : huñvreal a ra Berthou.

da zevel tiegez d'ar holoniou¹⁹, kaer o-deus kaoud dre-oll kleñved ar vro. Ouspenn 'zo : Nao hant vloaz 'raog Kristof Colomb, meneh Iwerzon o-devoa disklêriet an Amerik²⁰. Marteze o bugale²¹ o-deus bet soñj a ze, rag hirie an Iwerzoned, gwallgaset deuz o bro gand al lored²² saoz, 'zo deut da veza eul lodenn nerzuz-meurbed 'barz ar Stadou-Unanet. Bez' ez int gwell gourenerien, korvet mad, doujet en oll emgannou, ha c'hwi 'oar pegement 'zo da vrezeli herie 'vid galloud beva.

Laret am-eus ema ar bed o vond da weled dihun gouenn ar Gelted. Petra ? N'om ket pemzeg milion ? Ar hantved a deu a welo, dre zur, ar gouennou en em stoka, hag ar bed lodennet a-nevez etreze. N'hoh-eus ket gwelet, n'eus ket pell, dihun gouenn ar Judevien²³ ? Karget he-deus ar bed a dourni. Ar ouenn-ze, da hras Doue, 'zo muioh doujet dre he finvidigez eged dre niver he mibien. An treh ne bado ket eviti, ha p'he-deus soñjet uhala ar bed, me 'gred he-deus huñvreet. Êsaet he-deus uhali ar wirionez ha gwella karantez an den 'vid e vro. - ar Judevien 'ma o bro leh ema an arhant da skrapa - mez an treh 'vo hebdale d'ar Gelted²⁴ pere a gar dreist-oll al leaded hag o mamm-bro.

Unvaniez da viken, en despet d'ar moriou, ha gallouduz - Doue ra vezo meulet ! - ar Gelted, pere 'zo bet c'hwezeg kant vloaz o vallozi o laeron-vro, ar Gelted a wel bremañ, en sklêrder ar beure, ar Gwir o vond etreze an oabl. Rag ma'z om-ni ivez bugale da Zem²⁵, mab da Noë, peogwir om deut deuz plenennou uhel an Azi, on daouarn, da vihanna, n'int ket goloet a loustoni gand tregont diner Judaz Iskariotez.

Ra vezo distaget an Droug, an Darvoud hag ar Reuz ! Ar Vretoned a zeblante kousket mad 'pad 'n em skuize ar re all o redeg war-lerh plijadur ar horv²⁶, 'mesk breinadur an nevezentiou, hag o lonka frouez kontammet ; ar Vretoned chomet yah a gorv hag a spered a ya bremañ da zevel 'barz an enor.

Ni a ziskuize, hag on huñvre 'ree dim beva 'barz al liorz vleuennet ha c'hwezet mad, leh ema plijadur an ene. Ha p'ema ar re all o vervel gand an naon, eun naon heb diwez, ni 'zo bremañ dare da rei or gwad, glan ha gwerh, hag on eneou manet yaouank, evid rei deoh ho-tiou²⁷ an treh, Justis ha Liberte.

« C'hwezeg kantved 'zo tremenet ». Ha setu bremañ eur an dihun joaüz evid an oll Gelted. Beb bloaz eur bagad tud, deut a-berz peb bro geltieg, 'n em gav pe en Iwerzon, pe en Skos, pe en Bro-Gembre, pe en Breiz-Izel. An daouarn 'n em wask evel 'tre breudeur garantezuz. Ar mennoziou mad hag uhel a verv dindan an taliou. Ar broiou a deu da weled sklêr war o stad ha da weled ema ar gwir en o zu.

Ha setu bremañ moueziou o sevel dre-oll, tro-war-dro truezuz ha joaüz, joaüz evel deiz war-lerh an treh. Pep hini 'oar zo erru deveziou braz. Ar yez koz 'zo adsavet

¹⁹ eh eo kap ar Vretoned da vond da zevel tiegez d'ar holoniou : neuze ez int kap da zistruja broiou...

²⁰ Nao hant vloaz 'raog Kristof Colomb, meneh Iwerzon o-devoa disklêriet an Amerik : Peleh e-noa kavet an dra-ze ?

²¹ o bugale : bugale ar veneh ?

²² al lored : tud lor. Greet e-neus Berthou eun ano-kadarn gand eun ano-gwan.

²³ dihun gouenn ar Judevien : "antisemiteg" e oa Berthou, evel eur bern tud en amzer-ze.

²⁴ an treh 'vo hebdale d'ar Gelted : huñvreal a ree Berthou. N'eus nemed eun darn euz Iwerzon a zo digabestr, hag e komz saozneg nemetken, tost da vad, an Iwerzoniz !

²⁵ Zem : Sem, hendad ar poblou semiteg.

²⁶ Ar Vretoned a zeblante kousket mad 'pad 'n em skuize ar re all o redeg war-lerh plijadur ar horv : dizoñjet e-neus Berthou mezventi ar Vretoned !

²⁷ ho-tiou : Iwerzon ha Breiz.

'barz an enor, ha dreizi e hallom distrei a-hed an amzer dremenet hag erruoud beteg on zadou hen²⁸.

Ar Barzonij, kurunennet gand deliou dero, a dremen hag a adtremen en on touez, leun a veurdez evel en amzer or Brazder. Stoka 'ra ouz an taliou hag ar varzed a zav, niveruz 'vel ar stered.

Ar yez a lavared 'oa o vond da vervel a gan bremañ gand heh oll vraoder ha gand he nerz gouez war muzellou ar Vretoned, hag a lavar ezommou eur bobl n'houll ket ankoueza heh amzezh dremenet, ha n'houll ket beza diskaret. Ar yez-se he-deus adsavet he glander.

'Pad e oa oh êsea he distruja, 'mesk an dud izel, an dud ouizieg a laboure anezi, sioul, dre zindan. Savet deuz an draonienn d'an neh, setu-hi bremañ o tiskenn deuz an uhelder, gwalhet ha koant. Degas 'ra d'ar bobl an esper hag ar joa, ar houniou kaer hag ar balhder. Ema war muzellou kement hini en-deus eun dra bennag da lared. An neb en-devoa eun tamm mez o komz brezoneg, n'eus ket c'hoaz pell, o-devo plijadur, warhoaz, o komz ar yez kaer-ze. Bremañ e kaver eo enoruz-meurbed beza Breizad. Goapadennoù ar Hallaoued a dremen warnom evel an avel war eur rohell.

Eun dihun eo, mez beza eo ivez eun adhanedigez. Eh eom da gaoud Barzed, Barzed gouizieg evel gwechall. Ar bloavezh 1899 a zo bet sakret meur a hini war an daol-vên, en Kerdiz. Mez en or bro eh int sakret ivez dre o gouiziegezh ; barzed int dre o awen, barzed int dre o yez. Ar re-ze or haso d'an Treh.

Nann. Arzur n'eo ket maro. An neb hen gwele an noz war gribenn ar menezioù, e penn d'e vrezelourien, pe war goabrennoù ruz an abardaez-noz, ne oant na diodien nag huñvreerien. Unan deuz e varzed 'zo en on touez.

²⁸ on zadou hen : on hendadou.